


Ia, sant Jermen, ni labouro
 Evit Doue, evit ar vro,
 Betek ma 'z imp d'ar baradoz
 Da gana deoc'h kaeroc'h bennoz !



IMPRIMATUR :

Lambézellec, 19 Juillet 1909.

A. GADON, V. g.

PARREZ PLOGASTEL-SANT-GERMEN

Kantik Sant Jermen

ESKOB AUXERR

DISKAN :

*Holl a-unan, kanomp laouen
 Henor ha gloar da Zant Jermen !
 A greis kalon, ni a gano
 Er chapel a zoug e hano !*

1

Henor ha gloar, eskop karet
 Gant an dud paour ha glac'haret.
 Ho madelez, hed an hentchou
 A daole puilh madoberou.

2

Henor ha gloar, eskob brudet
 Evit al lufr eus ho spered :
 E kalz broiou, gant gouiziegez,
 Ho peus hadet ar virionez.

3

Henor ha gloar, a-berz Bro-C'hall :
 Sakret ho poa 'vit he diouall,
 Diouz eur bobl gouez prest d'he breva,
 Ar verc'hez c'hlan Genoveva.

4

Henor ha gloar, 'vit ar skoazel
 Roet da Vreiz-Veur, hed ar brezel
 Great gant ar Gaou d'ar Virionez,
 Gant ar Goumar d'ar Garantez.

5

Henor ha gloar, 'vit ar c'houentchou
 Savet eno tost d'an aochou :
 Rak ac'hano 'teuas e Breiz
 Ho tiskibien gant ar guir feiz.

6

Ia, trugarez, gloar hag enor
 D'an neb en deus harpet Arvor,
 Eneb armeou eur mestr garo,
 Betek ar pred eus e varo !

7

Mil bennoz d'eoc'h, o sant Jermen !
 Seveni 'rit kement peden,
 Kement mennoz a nij d'an nenv
 Var diouasket eur fizians krenv !

8

Grit ma lintro splann 'vel an deiz
 En hor spered sklerder ar feiz ;
 Grit ma talc'himp sonj ho skoueriou,
 Evit difen hon oll guiriou !

9

Hon diouallit diouz peb klenved,
 A wask ar c'horf hag ar spered :
 Hon diouallit diouz ar boan benn,
 Hon diouallit diouz an anken !

10

Gant an ezen, mintin ha noz
 Grit ma nijo keit ho pennoz
 Ha m'en em led son ar c'hleier
 Var hon tiez, hor parkeier !

11

El labour ni vevo santel ;
 D'an oferen ni vo fidel ;
 Komz ar beleg ni a glevo ;
 Korf hor Zalver ni 'resevo.

12

Hed hor buez, ni 'vo nerzus
 Da vale var roudou Jezuz,
 Daoust d'ar skouer fall, ha d'ar geier
 A red ker stank, en hon amzer.